

Au fol^o 149 recto, seulement le titre :

(149 recto)

Traoulavane.

[rien aux fol^{es} 149 verso et 150 recto.]

(150 verso)

Traou lavane.

Brawan plac'h iauant a vale
 & plac'h er bian a (1) Berlawène

Brawan plac'h dol troad war douar
 An eol na wel ket he far.

Traoulavane a levere
 Ti ar bian kos pa n' arrie :

— Bonjour ha jua bars an ti man,
 Janet er Bian pellac'h a man ?

— E medi er park o labourat
 O c'honit he boëd hag he dillat.

(151 verso)

— Traoulavane en deus mado
 Hag hen bewo mad hag hen gwisko.

hen bewo hag hen gwisko er fad
 hep mont d'er park da labourat.

Roët din ho merc'h wit pried
 Da labourat n'hen c'hassin ket.

(1).- a est ajoutée.

Traoulavane a levere
Er ger de c'hoar pa n'arrie :

— Groët e meus en dro da vreï
Bet hon 'n Nanvet hag en Paris

Na na meus ket goëlet merc'h biskoas
Ker Koant ha hini 'r bian bras.

(152 verso)

— Mar ge Ker Koant a ma leres
Kemer anei evit da vates.

Kemer anei des servijiñ
ha tremen da amzer ganti :

— Ma c'hoar Vari, chui gred dach-hu
Meus me eun inne plous id du ?

Me ne meus ne mert eun inne
ha mar gallan vo da Doue.

Janet er bian a levere
Da Traoulavane en de Se :

(153 verso)

— Ma fried Ker leveret din
Para leriñ pa n'arriiñ.

Para leriñ, leverit din
En Traoulavane pa n'arriiñ ?

— Roet din Skabel d'azean
~~Serviet~~ da n'hen de choëzan,
lien fin
hag euz pantouffou da wiskan,
Pa ne me e an Itron aman.

Ma lere an Itron newe
Pa n'arrie en Traoulavane.

(154 verso)

[—] Roët din Skabel da azean
Serviet da n'hen di choësan,

hag eur pantoufflou da wiskan
Pa na me so Itron aman.

Ar c'houarnet[re]s neus respontet
Da blas'h er bian vel deus klewet:

— Itron aman na vefet ket
Mert da c'hortos gwel da donet

Merc'h eur Presidant a Raon
A deus aman da Itron.

155 verso)

Merc'h er Bihan vel ma klewas
Tañ goëch d'an douar a simplas

Taer goë[er]h d'an douar a simplas goëas
Traoulavane ken goureas.

— Kars te prest demeus an ti man
Pe ma (1) ia souden d'es lachan

Rak panaout er Serrich vad
E teus te bet rentet d'am zad

Gouarnerez, goufe er fad
Te a nije bed kant fazad.

—
An dimezel vel deus klewet
E deus skruivet de breur Kadet

156 verso)

Skruivet de breur a wa 77 Paris
Retorn der ger war he c'his.

—
— Bonjour a joa an ti man
Pellach aman ma breur c'henan?

(1).— Le ms. porte : ma (lire : me) ; — au vers précédent, lire : Kars (ms. : Kars).

— É man du man en he wele
Merc'h eur paizant 'me goste.

— Traoulavane, d'in-me lezet,
A gvir e peq a meus Klenet?

Eur baïantes teus eureujed
Ha da ligne dishonored?

— Ja gvir e 'r peq a teus Klenet
Eur baïantes meus eureujet

Eur baïantes meus eureujet
Non ket wit se dishonored.

(157 verso)

Mar boa dec'h eur baïantez
hinie an de c'he Baronez

Kousket euy nos deus ma choste
En gra 'Stron hag a galite.

— Traoulavane, Sav a le se,
Pe mes treuzo gant ma Klenve,

— Otrio Baron ma fardonnnet
Ma fied paour na lachet ket.

— Chonet n'ho Koele ma 'Stron
Me distkenno gant er Baron.

An hini d'le kol a gollo
Gant graq Doue me choneo.

(158 verso)

—
En pors pa ne bet distkennet
Seiz denjentil en deus Kaët.

Seiz denjentil deus he ligne
Prest ho seiz d'a choari 'r Klenwe.

—

Traoulavane a levere
De Itron iaouank an de Se :

— Jannedek Koant, ma gwir fried
Betek Paris vo ret din monet.

(159 verso)

Ma breur Kadet a meus lac'het
Ha seiz deus he gompagnonet.

— Mar ge da Baris eo a c'het
Na vo ket pel na vin lac'het

Kement hini so en ho ti
Ar sel a dreus pa sellont ouzjin.

— Itronek Koant n'ho lac'hont ket
Da Baris ganen a teuffet.

—
Salut d'ac'h Roue ha rouanes!
Deud hon d'o Koëlet d'ho Pales.

— Petra, pot Breis, a teus te groet
Ma teus dem fales dem goëlet?

(160 verso)

— Seiz deus ma c'herent meus lac'het
Ma breur Kadet] eo en eizvet.

Ar Roue barvek a c'hoarse
Hag a lere da traoulavane :

— Ke da vit da baïdantes
Ewit he diez dem fales.

—
Ar Roue barvek a lere
Da draoulavane en de Se :

— Eur Itron goant e da bried
Bet out te gant hi ~~de~~ Kousked?

(161 verso)

— Ia bet on gant hi o Kousked
Tri mis so e c'homp eureijet.

90

— Ma na vijes ~~Kaët~~ bet eureujet
Dem mab Dauphin ken boa miret

Me moa hi miret da Rouanes
Dem mab Dauphin en he bales.

Peç so tiemenet So tiemenet
Ar re So maro So ankoët.

2 Den ouzit na glasko offer
1 Traoulavane, retorn dar ger,

Ken a fauto d'in me da Kaët
Da Gabiten d'em Soudardet.

—
)

[trad. franç. de cette pièce,
par Penguern,
aux fol.^{es} 151-162 rectos.]